

**BACCALAURÉAT GÉNÉRAL
SÉRIES L - ES - S**

**BACCALAURÉAT TECHNOLOGIQUE
SÉRIES STMG - STL - STI2D - STD2A – ST2S**

**ÉPREUVE ÉCRITE DE LANGUE VIVANTE II
BRETON**

Mardi 23 juin 2015

Séries **ES/S** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – coefficient : **2**

Série **L** Langue vivante obligatoire (LVO) – Durée de l'épreuve : **3 heures** – coefficient : **4**

Série **L** LVO et langue vivante approfondie (LVA) – Durée de l'épreuve : **3 heures** – coefficient : **8**

Séries **ST2S et STMG** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – coefficient : **2**

Séries **STI2D, STD2A, STL** – Durée de l'épreuve : **2 heures** – épreuve facultative

Session 2015

SUJET

Le candidat choisira le questionnaire correspondant à sa série.

Vous répondrez sur votre copie en précisant le numéro des questions.

L'usage des calculatrices ainsi que du dictionnaire n'est pas autorisé

Le sujet comporte 6 pages numérotées de 1/6 à 6/6
Dès que le sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.

BARÈME DE NOTATION	
1^{ère} sous-partie : Compréhension de l'écrit	10 points
2^{ème} sous-partie : Expression écrite	10 points

Diell 1**Pennad-kaoz gant Denez Pichon, rener Askorn Medical****Denez, peseurt studioù ho peus graet evit dont a-benn d'ober ho hent en ho micher ?**

5 Abaoe ma oan ur paotr bihan on bet dedennet gant an traoù teknikel, (ostilhoù ma zad o deus gouzañvet un tammig...) setu tamm-ha-tamm on aet betek tapout un testeni ijinour war ar mekanik e Pariz. A-raok kuitaat ar studioù, ne ouien tra ebet diwar-benn penaos e yae un embregerezh war-raok. Setu e-pad ur bloavezh em eus studiet merañ an embregerezhioù en IGR, Institut de Gestion de Rennes, e Roazhon.

10 Goude-se, pa zo bet kinniget din ul labour gant un embregerezh a glaske unan bennak evit ober war-dro penaos produiñ an emplantenoù e oan ken bamet o welet kement-se a deknikoù disheñvel. Diouzhtu em eus bet c'hoant da labourat er bed-se. Plijout a ra din ar mennozh da lakaat ma awen da servij an dud a zo o poaniañ evit bale pe evit bevañ hepken. Ijinet e vez ganeomp protezennoù evit al lez, ar glin, ar skoaz, an ilin, an arzorn, ha kement zo...

15 **Ha goude ? N'eo ket tout an dud a zeu a-benn da sevel ur stal... Penaos oc'h en em gavet d'ober an dibab-se ?**

Plijadur am eus bet atav gant ma labour, met pa oan erru skuizh o foetañ bro, hep gwelout ma fevar bugel o vrasaat, em eus dibabet krouiñ ma fost-labour din-me. Soñjet em boa e vefen mestr war ma amzer. Gwir eo met n'eo ket ken aes ha se atav !

20 **Petra eo bet an diaesañ, d'ar poent-se ?**

Ur riskl eo mont war an hent-se, met ma dibab a oa. Setu n'em eus ket da glemm. Feurmet em boa ur burev ha ne oa e-barzh nemet un daol, ur gador hag ur pellgomzer. D'ar poent-se em eus soñjet me ma-unan, "Bremañ ma 'teus c'hoant d'ober un dra bennak, dit-te d'ober ! "

25 **Abaoe un tamm amzer zo e tro ar stal. Ober war he zro en deus lakaet ac'hanoc'h da cheñch, en ur mod bennak ?**

30 Ne soñj ket din. Ret eo ober diouzh an endro. A-wechoù e ya mat an traoù ha gwechoù zo ne ya ket, met ret eo klask mont war-raok, memestra. A-benn ar fin n'eo ket startoc'h eget bezañ merdeer¹, forzh petra a c'hoarvezfe, amzer vrav pe amzer fall, ret eo klask mont betek ar porzh, memestra.

¹ Merdeer : den a vor

Perak ober gant ar brezhoneg, ouzhpenn ? Degas a ra brud, arc'hant ?...

Un afer a blijadur eo da gentañ, pe a garantez, memes, ha karantez hepken. Pa `z oan deuet en-dro da Vreizh en em c'houlennen petra ober gant ar yezh-se, tro-dro din, e lec'h ma oan o vevañ. Ne oa ket anat da gentañ. Soñjet em eus penaos kregiñ ganti. Setu-me da choaz un anv brezhonek evit an embregerezh, ha tamm-ha-tamm, dre arnodou, dre evezhiañ peseurt emzalc'h pe peseurt respont am boa pa 'm eus kroget da implijout ar brezhoneg on aet pelloc'h war an hent-se. Deut on da vezañ kendrec'het e oa un dra vat evit an embregerezh hag evit implijidi an embregerezh. Degas a ra brud un tammig marteze, arc'hant ne lavaran ket. Met a-hend-all, prechañ² brezhoneg ne goust ket ker kennebeut ! Un dibab eo hepken ha pep hini a c'hellfe ober an dibab-se, hep gortoz war-lerc'h ar stad pe me oar-me petra all... Bremañ diouzhtu-kaer hag e-lec'h m'emaomp o vevañ !

Un hekleb bennak a gavit e-touez hoc'h implijidi, ho pratikoù pe renerien staliou all ?

O selaou an dud on deuet da vezañ kendrec'het e oa ur mennozh mat ober gant ar brezhoneg. Padal n'eo ket an holl hag a gomz brezhoneg siwazh. Ar brezhoneg zo deuet da vezañ un dra hag a laka an embregerezh da vezañ disheñvel diouzh ar re all, ha bewech ma vez aozet un dra bennak gant an embregerezh tro-dro d'ar brezhoneg, abadenn evit prizioù France 3, pe ar Redadeg, e kemer perzh an holl implijidi. Evito eo deuet ar brezhoneg da vezañ ur seurt arouez pozitivel eus an embregerezh. E-keñver ar pratikoù ne soñj ket din hon eus bet pratikoù o tont davedomp abalamour d'ar brezhoneg. Ret eo anzav, memestra, hon eus bet pratikoù dedennet da c'houzout un tammig muioc'h diwar-benn ar yezh dianav dezho. Krouiñ a ra liammoù, memestra !

Tro am eus bet da gejañ gant meur a rener hag a glask lakaat ar brezhoneg war wel. Krouiñ a ra liammoù etrezomp, anat eo. Met a-hend-all, n'omp ket niverus a-walc'h, un tammig strewet e pep lec'h e Breizh, hag al lodenn vrasañ ac'hanomp a zo o redek war-lerc'h an amzer... Bodañ ar re o deus sinet ar garta "Ya d'ar brezhoneg" a c'hellfe bezañ ur mennozh mat. Un emvod bep bloaz da nebeutañ a rafe vad d'an holl !


Ha raktresoù all ho peus evit ar bloavezhioù da zont ?

Ganeomp e vez raktresoù ingal, met an diaesañ a zo dibab ar re a lakaio an embregerezh da vont war-raok er bloavezhioù a zeu. Kroget hon eus e-barzh kalz traoù abaoe m'eo bet krouet an embregerezh. Ret e vije deomp soñjal penaos ledanaat hon tachenn-gwerzhañ dreist harzoù Europa ar c'hornôg.

Ya ! Niv. 485, 26/09/2014

² Prechañ : prezeg, komz

Diell 2

A) Kompren (10 poent)

Tous les candidats traiteront les questions suivantes.

1. Peseurt yezhoù a c'haller implijout war lec'hienn internet Askorn Medical ?
2. Petra a oa er burev kentañ en doa feurmet ?
3. Petra a zegas ar brezhoneg da embregerezh Denez Pichon ? (Tri respont reizh a zo)
 - O brud vat
 - O yec'hed
 - O kalz arc'hant
 - O pratikoù nevez
 - O ur skeudenn disheñvel diouzh hini ar re all
 - O liammoù nevez e diabarzh an embregerezh
4. Perak eo aet Denez Pichon war e gont ? (Daou respont reizh a zo)
 - O abalamour ma oa skuizh gant rener ar stal el lec'h ma labourere
 - O a-benn beajiñ kalz
 - O evit chom pell diouzh ar gêr
 - O c'hoant en doa da vezañ mestr war e amzer
 - O evit gwelet e vugale o vrasaat

5. Perak e ra anv eus ostilhoù e dad ?
6. E pelec'h en doa graet e studioù (daou lec'h) ?
7. Hag emgavioù a vez etre ar renerien embregerezhioù sinet ganto ar garta "Ya d'ar brezhoneg" ? Adskrivit ar frazenn en diskouez.
8. Evit peseurt priz e oa bet anvet ?
9. War beseurt tachenn e labour stal Denez Pichon ?
10. E pelec'h e vez gwerzhet produioù Askorn Medical ?

Seuls les candidats composant au titre de la LVA de la série L (Langue Vivante Approfondie) traiteront en plus les questions suivantes.

11. Penaos e oa deuet ar c'hoant dezhañ da labourat war an emplantennoù ?
12. Perak en deus roet anv Askorn Medical d'e embregerezh ?
13. Penaos e komprenit frazenn Denez : "amzer vrav pe amzer fall, ret eo klask mont betek ar porzh"

B- Pennad-skrid (10 poent)

Choazit e-mesk ar sujedoù-mañ :

- **daou sujed (rann L), 150 ger dre sujed**
- **daou sujed (rann L LVA), 200 ger dre sujed**
- **ur sujed (rannoù all), 200 ger.**

1. Ha plijout a rafe deoc'h sevel un embregerezh ? Perak ha peseurt doare ha perak ?
2. Ma vefec'h ijinour(ez), peseurt enklaskoù ho pije c'hoant d'ober evit gwellaat yec'hed an dud ?

3. Betek peseurt poent e c'haller goulenn digant ar skiant astenn buhez an dud ?
4. Petra a c'hell bezañ un devezh labour e buhez Denez Pichon ? Kontit.
5. Ret eo deoc'h ober un staj en un embregerezh. Skrivit ul lizher da z/Denez evit lavarout ho c'hoant da labourat gantañ.